

AR GURUNEN
AOUR

000031



DIGANT

AR PAB

EVIT ANN ITRON VARIA-WIR-ZIKOUR,

E GWENGAMP,

ANN EIZ A VIZ GWENGOLO 1857.

War don : *Pourquoi cette vice allegresse* (1).

Ho ! peger braz eo ar joazudet
Zo savet enn hor c'halono ,
Pa hon euz e Breiz-Izel klevet
En dije ann enor hor bro
Da welout war benn Gwerc'hez Gwengam
Eur gurunen digant ar Pab ,
Eur gurunen aour roet d'hor Mamm ,
Hag eunn all da Jesus , he Mab.

DISKAN.

Kemerit , Mari , hor c'hurunen ;
Hag eunn arez d'imp ra vezo
'Vit ann hini zo enn ho kichen
O c'hortoz anomp enn envo.

Ar gurunen aour ze a lavar
Eo Gwengamp eul leac'h evuruz
E p'hini ar Werc'hez-Vad a gar
Diskouez he galloud burzuduz.
Hag e gwirione zo testeni ,
E pad tro pevar-c'hant vla zo ,
Penez eno pedenno Mari
Zo pedenno a viraklo.

'Vit ze he deuz gouneet ar vrud ,
War an douar ha war ann dour ,
Da veza galvet gant an oll dud
Itron-Varia-Wir-Zikour.
'Vit ze , pep bla , e deiz he fardon
E tired a-dost 'vel a-bell

D'he iliz ha d'he frosesion
Tud a bep koste Breiz-Izel.

Gwengamp , kear a enor d'ar Werc'hez ,
Dispak da vanielo kaera ;
Evit kuruni da batronez
N'espera nag arc'hant na netra.
Breiziz , tud a galon hag a fe ,
Deut a-leiz 'vit beza testo
War gurunidigez Mamm Doue ,
A denn war-n-hoc'h kalz a c'hraso.

O Itron-Varia-Wir-Zikour ,
Mamm hor Zalver , Mamm Doue-Den ,
Mari , trec'herez hon enebour ,
Gwerc'hez , mezellour ar c'hristen ,
Sellit ar Vretonet daoulinet
Dirag-hoc'h evit ho pedi ,
O lakat war ho penn beniget
Kurunen ann holl veulodi.

O'rouanez eled ann envo ,
Nin ho kemer 'vit rouanez.
Pedit , pedit 'vit hon ineo :
War ho pugale bet evez.
Ra zistroio d'ar gwir binijen
Ar bec'herien glac'har Doue ;
Ha ra gaerao ho kurunen
Ar zantelez euz hor bue.

K.

(1) Ann ton-man eo ann N^o 1 notennet e *Kantiko d'ar Werc'hez* , gret gant ann Otrou KARIS. Kavont rer ancze da brena e ti AR GOFFIC , e Lannion , hag e ti dimezelet TANGUY , e Gwengamp.

GANT AR PARDOUN.

War don : *Gicerz santez Anna.*

Petra nevez e Gwengamp a zo enñ devez man ?
E-pad ann deiz nemet trouz ha tremen na glevann :
Deac'h diveza d'ar c'houlz man ne oa netra e kear,
Eunn dra benak zo nevez, ne ket eunn dra dister.

Ho ! ia, eunn dra zo nevez ha ne d-eo ket dister ;
Eunn dra burzuduz awalc'h, ha dirak ann holl sklear :
Gwengamp zo el levez, o sonjal er Werc'hez ;
Chetu devez ar Pardoun, devez he fatrounez.

Gwengamp a zo re vihan evit eur bobl ker braz :
Pelerined a zo leun, erruout a ra c'hoaz
A Wened hag a Gerne, a Leon, a Dreger ;
Ha dre ann hent e kanont meuleudi ho mamm ger.

E kear dre ma erruont, e redont d'ar porched,
E-leac'h e ma gant he zae ar skeuden vinniget ;
Gwir-Sikour d'ann oll Vreiziz, Gwir-Sikour d'ar bed holl :
Eunn den deol d'ar Werc'hez ne d-ai biken da goll.

Ha goude eur beden verr, e vezo elumet
Eno dirak ar Werc'hez ar goulou binniget ;
Eur beden hir goude-ze, hag eunn dro d'ann iliz,
Gant kalz war ho daoulin noaz : ar feiz a zo diskuiz.

Breman da noz, kristenien, klevet petra vo great :
Ne d-eo ket a-walc'h klevet, c'hoaz a ve red gwelet ;

Peger kaer Prosesioun, peger sklear eo ann noz !
Pelec'h gwelet kaeroc'h tra nemet er baradoz ?

E penn ar Prosesioun merc'hed gwisket e gwenn ;
Ar belerined goude gant pep a c'houlouen :
Pelerined Gwir-Sikour, c'houi a zo kristenien !
Pebez burzud a welann, burzud ar gwir greden !

Goude-ze ar botred kre, pennadou bleo gant-ho :
Sellet-ho gwisket e gwenn ; pebez gras evit-ho !
Ar Werc'hez zo war ho skoaz dre ar ruiou douget ;
Ha mar renk ar skoaz plega, ar feiz ne blego ket.

Pa z-omp breman war leur-ger, sellomp peger kaer tra .
Gant tri zantad war eunn dro bolz ann env a sklaera ;
Tan a zo er prenestou, ha tan e dourn ann holl ;
Hag ann *ora pro nobis*, he-nez a zo dreist-holl !...

Peger kre ar feiz breizek gout a rit kristenien :
Na noz na deiz ne skuizo, ha ne gousko taken :
Breman da c'hortoz ann deiz an holl belerined,
Gourvezet war ar pavez, a gan joauz bepred.

Da c'houlou deiz eur belek ha kloc'h ann oferen
A laka ann holl war droad ; ha goude ar beden,
Ho c'himiad da Wir-Sikour a reont a galoup :
Ha gras d'comp da zont da vloaz da welet ann Itroun !

L. V.

